

KANTIK

D'AR GALON ZAKR

Evit Pelerinaj Bretoned Paris,
e iliz-veur MONTMARTRE.



Kalon Zakr va Jezuz, o pet truez ouzomp.

KANTIK

EN HENOR D'AR GALON ZAKR



VAR DON : *Jesu, dulcis memoria,*
pe : *O Kalon Zakr.*

DISKAN :

O Kalon Jezuz, hor Zalver,
Kalon dreist holl leun a zounder,
'N hoc'h iliz-veur, a-zioc'h Paris,
Selaouit pedennou Breiziz.

1.

Euz tro-var-dro beteg ama
Omp diredet da bardona ;
En hoc'h iliz, pell diouz hor bro,
Ni ra hor pardon braz hirio.

2.

A bep tu deomp ez euz, siouaz !
'Vit hon ene danjeriou braz.
O, er vro-ma, koulz hag e Breiz,
Mirit ennomp tenzor ar feiz !

3.

An tenzor-ze ken talvouduz
Ne zeuz nemet ho kras nerzuz
Goest d'hen delc'her stard en hor c'hreiz,
E mesk kement a dud difeiz.

4.

Mar domp aliez, beteghenn,
Bet fall da viret ho lezen,
Breman, stouet dirag ho tron,
E kriomp holl : Truez ! Pardon !

5.

O Kalon Jezuz, en deiz-ma,
Deoc'h e fell deomp en em westla ;
Deoc'h, a greiz kalon, 'n hoc'h iliz,
En em ro Bretoned Paris.

6.

Anez beza eur c'hristen mad,
Ne vezo 'den eur guir Vreizad.
Evit ober henor da Vreiz,
E rankomp beza tud a feiz.

7.

Siouaz ! o heuill ar bed diroll,
Kalz Bretoned a ia da goll.
Grit deomp-ni chom fidel bepred,
Daoust da holl skoueriou fall ar bed.

8.

D'hon diouall diouz ar bed fallakr,
Hor c'huzit en ho Kalon Zakr ;
Kuzet eno, ne vimp biken
Trec'het gant hon enebourien.

9.

'Vit merka deoc'h hor c'harantez,
Tenna varnomp grassou nevez,
'N hon tiez, gant devosion,
Ni zalc'ho imaj ho Kalon.

10.

Da dostât ouz an daol zantel,
O Jezuz, ni vezo fidel ;
Evit konsoli ho Kalon,
N'euz ket par d'ar gommunion.

11.

O Kalon Jezuz, ni ho ped,
Ra vevimp en ho kras bepred,
Ma c'hellimp en Ee, hor guir vro,
Ho karet, ho meuli ato.

Imprimatur :

Quimper, le 9 Mars 1909.

A. COGNEAU,
Vic. gén.